



Ma Botou Koat



Em bugaleach, pa oan,
 'M oa eur botou koat,
 Laket d'in gant ma mam
 Ma botou koat ;
 Hirio zalc'han bepred,
 Klik, klak, ma botou koat
 P'he deus ma mam d'in laret,
 Delc'ker ma botou koat !

Pa oan uheloc'h savet,
 Ma botou koat
 D'ar skol ez on bet kaset
 Ma botou koat
 Bet oun bet gourdrouzet,
 Klik, klak, ma botou koat,
 Gant ar mestr-skol gallek,
 Balamour d'am botou koat...

P'oa ma studi achuet,
 Ma botou koat,
 Oan eat da ziwall an denved,
 Ma botou koat
 Dreuz ar gorb hag al lann
 Klik, klak, ma botou koat
 Me valee ken skanv
 Gant ma botou koat

Potr yaouank en em gavet,
 Ma botou koat,
 Er pardonieu ez oun bet
 Ma botou koat
 Deus zon skiltr ar biniou
 Klik, klak, ma botou koat,
 Loc'h em fust ma zalonou
 Em zreid ma botou koat !

Sevel 'ren tam ha tammig,
 Ma botou koat,
 Oa deuet poent klask eur vregig
 Ma botou koat,
 Unan am eus kavet
 Klik, klak, ma botou koat
 Hon daou evrus meurbed,
 Gant hon boteier koat

Er park gant ma daou ejen,
 Ma botou koat,
 Me a are ar blenen,
 Ma botou koat,
 Ma dorn ed a hade,
 Klik, klak, ma botou koat
 Eost druz a ziwane
 'N roudou ma botou koat.

Ma bro Vreiz a difennan
 Ma botou koat
 Abalamour ma talc'han
 Ma botou koat,
 Rak hon zadou karet,
 Klik, klak, ma botou koat
 O deus ato meulet,
 Bepred ar botou koat !

Mes eun devez a deñio,
 Ma botou koat
 Ha neuze ma a yelo
 Ma botou koat
 Buhan en ber amzer
 Klik, klak, ma botou koat,
 Da gaout Per ar porcher
 Em zreid ma botou koat.

Mar tigoue d'ezan laret,
 Ma botou koat,
 Er Baradoz n'ez er ket
 Gant botou koat ;
 Me laro kenavo
 Klik, klak, ma botou koat,
 N' in biken d'an Nenvo,
 Nan, hep ma botou koat !

YAN AR C'HAROFF.



YANNIK AR POTR-FARO



:o:

Me eo Yannig, ar paotr faro (bis)
 Me eo kaera potr yaouank vale ebars ar vro !

DISKAN

Rou, rou, rou lon vin, rou, rou, rou lon lon vin,
 rou li, rou li, re te

Balamour da ze ar merc'hed a zo o klask lampât ganen
 Balamour oun eur potrig koant hag eur potrig laouen

Mes o welet an hoil draou-ze, e teuas em fenn eun dervez
 C'hoantât donet da zimezi ha da glask eur vaouez

Pa oa groet ganen-me ma sonj ha me mont eus ma zi,
 A betek ti ma mestrez da c'houlou anezi

Pa oan 'n em gavet 'barz en ti, neuze e ris ma c'hompliman,
 Raktal oa galvet dirakon, Janedig, ma holl c'hoant.

Mes hi dustu, he deus laret, penaoz n'am c'hemerje ket,
 Balamour ren re a ardou ha re oan potr ar bed...

D'ar ger me a zo êt mezek, oh ! ya dre vord ar venojen,
 Sonjal oa eur zac'had moged ganen-me war ma c'hein.

Breman em eus hanter kant vla, oh ! me gred tapin ma c'hant
 Goude m'am ije c'houec'h ugent, renkin chom gant ma
 [c'hoant.]

Yan ar C'HAROFF.

Moulez, A. LAJAT, Montroulez